

PEDENN AR MERDEAD

KENTAN DISKAN

Mired hon bago, hon listri,
Gwerc'hez, mammen ar graso ;
Gret na noazo d'ar verdaïdi
Nag avel, na kuruno,
Na kerrek, na gwagenno :
Ni 'westl d'Ec'h hon c'halono (*bis*).

KENTAN LODEN EUZ AR C'HAN

Micher boaniuz ar verdaïdi

Ar merdead, den reuzeudik,
Evit gonid e vue,
Noz-de 'renk sturian e vagik,
Dindan ar glav, an arne.

Ar mousik bihan e-unan,
(Bugelik c'hoaz ken dister !)
Pell diouz e vamm a renk poanian :
Gwerc'hez, bet mamm 'n e genver !

O kwitât an ôd

Deomp ma bagik, kerz prim breman,
Displeged eo da welio :
Gwerc'hez, plijet gan-Ec'h levian,
Skanvoc'h 'ze 'vo ma foanio.

Ar merdead o sonjal en e bec'hejo

Meur a besk a gav e varo
O livoedan an higen :
Mewenti ha gwall-ebato
A goll kalz a gristenien.

Diegi ar pec'her

Ho ! gand pebez nerz e stourman
Ouz ar mor, pa ve garo ;
Pegen diek on, pa glaŝkan
Gonid war ma gwall-decho !

Grevusted ar pec'hed marvel

A-walc'h eo eur gwall varr-avel,
Evit koll bag ha bue :
A-walc'h eo eur pec'hed mervel
'Vit 'n em goll korf hag ine.

Braz eo hon c'heun o koll eul lestr,
Karget a bep seurt mado :
El mad, pa gollomp gras ho Mestr,
C'houervoc'h kalz eo ho kanvo.

Stad truezuz ar pec'her

D'an od prim e renker levian,
Pa deu ar vag d'ober dour :

Ken prim e tlefen, pa bec'han,
Mont da glask eur c'hoyezour.
An dienez war ar mor glaz...
Moraer. . pebez stad euzuz !
Stad an ine 'zo gwasoc'h c'hoaz,
Pa dilezer tól Jezuz.

EIL LODEN EUZ AR C'HAN

*Ar merdead o tistreïn ouz Doue
E c'hlaç'har*

Euzuz mor-drouz ha kuruno,
E-pad eun nozvez teval :
Spontusoc'h meurbed eo mouezo
Ar re daonet o yudal.

D'an hanv, pa diver ma c'houezen,
Pa skalf ma daouarn, er goan,
Me 'zonj en Mamm ar bec'herien,
E-tal ar groaz o ouelan.

E fian

Liez 'renk eul lestr, pa distro,
Gortoz en pleg ar porz-mor :
Kalon Mari, dor an Nenvo,
A zo d'imp bepred digor.

Aliez hon euz kalz a boan
O pardoni hon mestro :
Jezuz a bardon peb-unan
'Vid eur berad gwir daero.

Ma zud a drid, pa douaran,
Goude eur gwall varr-amzer :
An Nenv a drid mui, pa deuan
Da zistrei ouz ma Zalver.

E joa

Pa zend ar vagik ouz ar stur,
Pebez joa d'ar voraerien ;
Da Zoue pebez plijadur
Pa zenter ouz e lezen !

Kaer ha gwenn-kan eo hon gwelio,
Pa strink eur hann-heol out-e ;
Kaeroc'h c'hoaz eo hon ineo,
Pa luc'hont gand gras Doue.

PEDEN AR MERDEAD D'AR WERC'HEZ

Mar yud an avel dirollet,
Mar kroz ar gwagenno braz,
Stereden-vor am c'hennerzet
Dre ho kalloud hag ho kras. *Miret, etc.*

Ha, mar deu ar mor d'am lonkan,
Bezet mamm d'am bugale :
Piou o diwallo er bed-man ?
C'houi, Gwerc'hez a drugare !

War-n-e skuilhet, Mamm a drue,
Ho teneran madelez ;
Dre ma teuyo an oad d'eze,
Gret ma kreskfont en furnez.

Bezet true ouz ma fried,
Ha dizec'het he daero ;
'N he faourante he zikouret,
C'houi, skoazel ar priejo.

Bet c'hoaz true ouz ma mamm baour,
Mantret gand ar velkoni ;
Ho true 'zo welloc'h 'vid aour,
Plijet harpan he c'hosni.

Pa lezfomp bago ha listri,
Kemeret hon ineo,
Prizet ambroug ho merdaïdi
Bete porz kaer an Nenvo.

Mez, bemde, bemnoz, dre vuzud,
C'houi hon mir a wall-varo :
Ra welfomp eta c'hoaz hon zud !
Rouanez hon c'halono.

Gred eo ma fedenn gant fian ;
Rak peb-unan a lavar :
Mari 'zo mamm an esperans,
Biken na ray skouarn vouzar.

Sturiet breman ma bag d'an ôd,
Hep drouk ha gand al lano,
Ha joauz-braz, ar martolod
En hoc'h enor a gano.

DISKAN DIWEAN

C'houi 'vir hon bago, hon listri,
Gwerc'hez, mammen ar graso,
C'houi 'vir na noaz d'ar verdaïdi
Nag avel, na kuruno,
Na kerek, na gwagenno :
Gloar d'Ec'h, mammen ar graso. (*bis*)

Ha pa vefomp distro, Gwerc'hez,
Beo ha yac'h dre ho krad-vad,
Ni 'gano c'hoaz gand levenez,
Evid ho trugarekad. *C'houi vir hon bago.*

GWERZ SANT KEMO

PATRON AR VARTOLODED

War don : *Santez Mari, Momm Doue, pe don kelven.*

DISKAN :

Patron karet tud an od, sant Kemo binniget,
Pedet 'vit Lokemoiz, 'vit ar vartoloded ;
Gand fianz ar verdeidi ho ped a galon vad,
Reit d'ê, otro zant Kemo, reit d'ê holl o mennad.

— O broik koant Lokemo, o douar binniget !
Lavar d'in piou a weljout, gwech-all goz, o tonet
'N eur vag-vin deuz bro Erin da gad an Arvorik,
Hag hi holl ken truezuz o kanan 'n o bagik ?

— Piou a weliz ? C'houi lavar : me 'm euz gwelet a-bell
Ar zent koz a enoromp o tont da Vreiz-Izel :
Gouelan a raent truezuz o kwitât o farroz
Hag iliz o badeiant ha bered o zud koz.

Efflam, Tuder a welen, gant-e Kare, Nerin,
Haran ha kalz a zent-all deud a enez Erin,
Ha sent kosan a Dredrez, ar zent a garomp-ni,
Zant Kirio ha zant Kemo, patron ar verdeidi.

— o —

Sant Kemo, dre ho komjo, ha dre ho pinijen
Ho peuz astennet, gwech-all, en Breiz ar fe gristen ;
C'houi a deske d'ho proiz, goue kent ha divade,
E oant breudeur da Jezuz hag an eil d'egile.

Nag a wech hon zado koz o vale ho kwelaz
Dre oho meinek Tredrez bete lein Roc'hellaz !
Ha nag a wech en pep lec'h ho klevchont o prezek
Rak komz a rec'h evel-t-ê, komz a rec'h brezonek.

Nag a wech, pa groze stard an avel hag ar mor,
E tridaz c'hoaz ho kalon a dad hag a bastor !
War ar gwagennou diroll ho pedenn a drec'he
Ha bagik ar pesketaer d'ar porz a distroe.

'Vel gwech-all, hon bago 'zo hijet gant ar mor glaz,
Dour ho fantan buzuduz 'zo ken skler ha biskoaz,
Krec'h Kemo a doug bepred e reier war e benn :
An treo a bad en-dro d'imp, ni hepken a dremen.

War an tevenno huel a red gand ribl ar mor,
Hon zado koz a westlaz eun iliz 'n hoc'h enor
Ha, goude ken hir amzer, ho lezen anzavomp,
Lokemo 'vir hoc'h hano, 'n hoc'h iliz e pedomp.

Bet eo person sant Ervoan eiz vloaz en ho parrez,
Ha Jezuz 'n euz roet d'imp e Vamm da batronez,
Skuilh a ra war-n-omp bemde sklerijen ha graso
Ho pebl a dlefe beza ar gwellan euz ar vro.

— o —

Kalz aman a renk kwitât o broïg Breiz-Izel,
Evit gonid o bara e renkont mont pell-pell ;

Graet d'eze distrei d'ar ger, zant Kemo tad karet,
Didamall, dinam dalc'h-mad, evel gwir Vretoned.

Roet avel vad bemde da vag an ocherien
Evit ma teuint d'ar ger pinvidik ha laouen,
Ha da Lokemo, pep pla, gand o bag hi 'deuyo
Da dremen an dud a bell a ya d'ho pardonio.

Nec'het eo an intañvez 'zo manet hec'h-unan ;
Hirie eo diez sevel ar vugale vihan :
Sikouret-hi, sant Kemo, ma vezo kalonek
Da c'hallout rei d'ê furnez ha bara pemdeiek.

D'ar verdeidi 'deu aman 'n hoc'h iliz, sant Kemo,
Roet yec'hed ha bue 'vel ma rec'h d'hon zado ;
Bepred eo braz ko kalloud e-barz ar baradoz,
Graet burzudo evid-omp evel 'vid hon zud koz.

— o —

Ha pa welfet an avel, Kemo hon fatron-ni,
O sevel ar gwagenno da ruilhal hon listri,
O kas, o tigas anê euz eur garrek d'eben,
Neuze, o paeron santel, ho pet sonj d'hon difen.

Hon zad, ho pet sonj neuze ec'h omp bet daoulinet
En hoc'h iliz Lokemo, war douar ho pered ;
Ho pet sonj e zo eur vamm ha bugale er ger
Ha n'o deuz ken da vevan nemet poan an ocher.

Reit bepred da Dredreziz, reid beped gwir zikour
Ha, neb lec'h ne valeo 'vel o fetred war dour,
Pa dalc'h sonj mad eur breton eo badeet kristen
N'euz den da drec'hi war-n-an, na ne vezo biken.

Pa vo pell deuz e di plouz, 'zo du-hont war an od,
Diwallet bugaligo ha tud ar martolod.
Mar n'hall dont da Lokemo gand devez ho pardon,
Hi 'deuyo zur evit-an ha 'vit e anaon.

Eur bugel war-lerc'h e dad a red laouen bepred
Ha war ho lerc'h ken laouen e fell d'imp-ni kerzet ;
Hag an holl ouz hon gwelet, kouitebunan 'laro :
N'euz ket da garet o zent evel tud Lokemo.

War o lerc'h, war an douar, ni a heuilho bepred,
Ni 'heuilho lezen Doue, en hent al lealded,
War ho lerc'h, o sant Kemo, didamall ha joauz,
Ec'h arifomp, war eeun, en Nenno, gant Jezuz.

Ma Jezuz mizerikord ! (100 devez a induljans).

IMPRIMATUR :

Brioci, die 29^a Septembris 1898.

M. LE PROVOST, *vic. gén.*